

KIS-608 – Gl. parapsychologie, télépathie, Sz. extrasensory perception

(YVT da GE – 29 11 98)

Oc'h adlenn pennadoù bet troet ganin e brezhoneg evit ar vugale, ul laziad zo, e kejis ouzh ur poz diarvez bennak. Pa oa bet roet din da gejañ ouzhoc'h e ser izili BAYA, bennozh da Herve Kerrain, Doue d'e bardono, e skrivan deoc'h, e berr, pezh a 'm laka diaes :

Ar Gl. *parapsychologue* ha *parapsychologie* a drois e *trabredoniour* ha *trabredoniezh* anez kavout gwiriekadenn neblec'h.

Ha gallout a rafec'h lavarout din pezh a soñjit eus *pellsanterezh* a-dal d'ar Gl. *télépathie* ?

Ur poz diskempenn ha divalav a lakais a-dal d'ar Sz. *extrasensory perception* : *merzadoù dreist-santout* ! Ha ne ve ket gwell da gavout ?

(GE da YVT – 03 12 98)

Kudennoù amjestr a-fet Yezhouriezh a stignez aze.

PARAPSYCHOLOGIE

Rannomp, mar karez, hon imbourc'h etre tri lankad : an divoud, an anvadoù er yezhoù all, an anvad e brezhoneg.

— An divoud. Ar P a studi darempredoù 'zo etre bred hag alvez a chom andispleget ken gant ar Vredoniezh, ken gant an Alvezoniezh. A-zalc'h ouzh ar gealiadurezh o ren e pep mare e vez an displegadurioù kinniget : distro an anaon en oadvezh rakgouiziel, an treuzkas mennozioù en oadvezh ar pellgehentiñ, ur perzh dianav eus an danvez e grez al loc'honiezh pementadel — pep displegatur o chom e par ar goulakaat, sac'het bep taol dre un arbenn a Ouiziadoniezh : dic'hallus eo savelañ

un devoud o tennañ war un dro d'ar bred ha d'an alvez, rak diwar geal an alvez (Gl. *monde physique*) ne c'haller ket ergrafañ keal ar bred (Gl. *psychisme*) hag a-geveskemm. Padal, e diouer un diskiblezh o vont hebiou d'an dic'halluster-se, eleze oc'h ober reiz a-gevan war alvez ha bred, e ranker tremen gant goulakadurioù bac'h. Kement-mañ ne vir ket na ve devoudoù andisplegatus ha... danvez displegaturioù.

— An anvadoù er yezhoù all. E kreiz an 19^t kantved e voe krouet Gl. *spiritisme* da envel ar c'hehentiñ gant an anaon ; ar *sciences métapsychiques* (e tro 1900) a c'houlakae ar vezañs eus “galloudezhioù bred dianav c'hoazh” ; e tro 1900 ivez e voe kinniget Gl. *parapsychologie* da envel studi an anadennoù “bredalvezel” andispleget (treuzkas mennozioù, merzhout hep haeziñ, denaout an dazont pe an tremened, gwezhiañ war draezoù hep stekiñ outo) ; abaoe ar bloavezhioù 1970 e reer anv eus Sz. *paraphysical theories* soliet war arlakadennoù ar C'horrfizik hag arzaeladur pennaenn an arbennelezh.

— An anvadoù brezhonek. Skoempat trevell eo envel un diskiblezh nad eo ket savelet. Kentañ tra a ranker ober evit savelañ un diskiblezh eo despizañ he divoud ; hogen divoud ar P n'eo ket despizadus diwar-bouez al loazioù kefredel a zo en hon c'herz : an anadennoù studiet zo war un dro alvezel hep bezañ displegatus gant saveletoù an alvez ha bredel hep ma ve ar Vredoniezh evit ober reiz warno. An anvadoù etrevroadel zo disoc'h un emdennañ dre ober mousdave d'an enkadenn ouiziadoniel : an diskiblezh n'eo ket tre ar *psychology*, met o vezañ ma tenn da draoù ar bred, lakaomp emañ e-kichen (*para-*) ha greomp anezhi ar *parapsychology* ; heñvel dra, n'eo ket tre ar *physics*, met peogwir e pled gant anadennoù alvezel arbennik, arlezat (*para-*), greomp gant *paraphysical theories*... Ne c'haller ket enta evit an ampoent sevel anvad brezhonek kevazas un diskiblezh a zo dic'hallus despizañ he divoud hag an hent nemetañ a chom dimp eo an amprestañ : pe amprestañ an termenoù hag ober gant Br. *Parapsikologiezh*, *Parafizik*, arlakadennoù *parafizikel*, pe amprestañ ar c'healioù ha luniañ Br. *Lezvredoniezh* (plakadur kealel diwar Gl. *parapsychologie*). Diwall : *Trabredoniezh* (Al. *Metapsychologie*) zo un termen a Ouiziadoniezh ; arveret eo bet gant FREUD da envel an diskiblezh a venne sevel a oa, en e spered, en ur c'heñver a drehontelezh gant ar *Vredoniezh*.

TELEPATHIE

Un hentenn Yezhouriezh heñvel a ve da heuliañ evit kaout kevatalioù brezhonek da Gl. *télépathie* ha Sz. *extrasensory perception*.

Daou gemeradur zo da Gl. *télépathie* : "santad emeur e darempred gant unan all hep araez ur sanell alvezel", "kehentiñ gwerc'hek gant unan all hep araez ur sanell alvezel". Devoudoù deskrivadus zo aze hag aesoc'h e vint moarvat da envel. Div gudenn zo da ziskoulmañ :

1° Ar stirann *-path-*, dibabet (en 19t kantved) p'en kaved ivez e *sympathie*, ne ve mui kemeret hiziv er ster-se ; evit ar c'hemeradur kentañ e tere a-walc'h Br. *-sant-* ha deveradoù. Evit an eil, e c'hallfed mont da *-kehent-*, *-kel-*, *-naou-*.

2° Ar rakger *télé-* en deus sammet, abaoe an 19t kantved, dre e arver er c'hehenterezh ur c'hennotadur elektronek o verzañ hiziv an durc'hadur ster en deus e *télépathie* ; alese dre an un abeg ez eo diaes ober gant *pell-* en durc'hadur-se ; marteze e tremenfe c'hoazh er c'hemeradur kentañ, seul gent ma'z eus eus *pellsanterezh* er yezh lennegel ; met forc'hellek ez afe en eil kemeradur, dre ma kaver endeo e brezhoneg *pellgehentiñ*, *pellgelaouiñ*, h.a. Dibab a c'hallfed *tra-* "en tu all, dreist, Et. *meta-*" bet arveret betek henn da verkañ ar c'heñverioù a drehontelezh er Ouiziadoniezh (sk. *trabed*, *tralavar*, *traistor*, *trareizhiad*, *trabredoniezh*), hogen ur riskl a forc'hellegezh a c'hallfe emgavout : mar be luniet *traX* anvadoù an anadennoù lezvredel (pe lezalvezel !), e ve an termen *traXoniezh* en arvar da vezañ intentet en hevelep keñver gant an *Xoniezh* ha, lakaomp, an *tralavar* gant al *lavar*. Soñjal a rafen kentoc'h en un elfenn nebeut arveret c'hoazh (hag evel stirann hepken) : *troz* (hBr. *tros*, hKb. *traus*) a zo e ster orin "« passer à travers », « transgresser »" (DGVB 323). Ar mod kehentiñ-se a vez o *trozañ* roadennoù an Alvezoniezh hag ar Vredoniezh. Gant ur rakger *troz-* e savfed : *trozkehentiñ* (pe marteze, krennoc'h ha ken kevazas, *trozhentiñ*), *trozkelañ*. Un termen evel *troznaouiñ* a ve "dont emouez dre hent an trozkelañ".

EXTRASENSORY PERCEPTION

Sz. *extrasensory perception*, Gl. *perception extra-sensorielle* a verk ur merzhout hep araez ar skiantennoù, eleze hep haeziñ (gant ar brederouriezh kempred eo bet peurzespizet an termennoù-mañ, Gl. *perception*, *sensation*). Meur a ziskoulm a welan : *merzhout ezskiantennel*, *merzhout hep haeziñ*, *trozverzhout* (mar bez degemeret va c'hinnigadenn a-zioc'h).